

KANTIK SANTES BARBA

DISKAN :

*Santes Barba hor patronez
Plijet ganoc'h n'ho madelez
Pedi evidomp hor Zalver
M'hon diuallo e peb danjer.*

*Guerc'hez ha merzevez santel
Ni zeu da c'houlen ho skoazel,
Ezomm o deus e peb mare
Eus ho skoazel dirak Doue.*

*Alies o deus meritet.
Beza gant dorn Doue skoet ;
Dent d'hor miret dious ar poa-
[niou
A denn varnomp hor pec'hejou.*

*'Kreiss an arne, pa zomp spontet
Gant ar gurun hag al lued,
Buhan varnomp plijet asten
Ho torn galloudus d'hon difen.*

*P'e guir ho kalloud a zo braz,
Eur goulenn all a rafomp c'hoaz :
Mirit an dud hag ho madou
Dious an tan-goall hag he reu-
[ziou.*

*Mirit anezho dreis pep tra,
Mirit anezho da goueza
E kreiss an tan zo bet c'houezet
En Ifern 'vit an dud daonet.*

*Dious taolioù ar maro treitour
Ho diouallit 'kreiss ho labour,
Varnho plijet beilla bepret
'Vit na zigouezo drouk ebet.*

*Pa vo tostic fin hon amzer
Goulennit digant Hor Zalver
Ma vimp maguet araok mervel,
Ganthe gorf hag he voad santel.*



*St. Mandez, Chapelle Kenech Gwenn, Lennon
Lied in la fende de l'Ascension*

KANTIK EN ENOR DA ZANT MODE

8N2-2-034

DISKAN :

*Sant Mode, mignon mat,
Skoazell hon bro,
Pedit Doue, hon Tad,
M'hon divoallo,
Ma vo parrez Lennon
Tost atô d'E galon
Ha ma vimp da Zoue
Gwir vugale.*



*Sant Mode, sant benniget,
Ken bras atô e vrud,
Kalz a-rôk ma voe ganet
'Voe goueslet gant e dud
Da Zoue, hon gwir otrou,
Hon mestr'ker hag hon tad,
Da vont 'harz E oteriou
D'E zervicha ervat.*

*E dad, roue lwerzon,
Dek mab en devoa bet.
Met a-greiz holl e galon
'Voe goasket start meurbet
Pa gollas nao anezo,
Diskaret 'kreiz o brud
Ha sammet, siouaz d'ezo !
Gant enn droug kri ha yud.*

*Sant Mode, dre al lezenn,
Susitour 'oa d'e dad
Da c'houarn an enezenn
Pa vije deut en oad.
Eur brinsez a voe klasket,
Eur plac'h kaer hag a don,
Da roi d'ezan da bried
'Barz pignat war an tron.*

*Eur pried eus an douar
Ne felle ket d'ar zant :
Mari, hon mestrez klouar,
A oa bepred e c'hoant.
Ha, setu war e bedenn,
Ma teuas, 'n eun tîl-kont,
Goradou leiz e groc'hen
Ken a voe eur gwir spont.*

*Da c'houde 'voe beleget
Ha setu heon da Vreiz
Da skigna, gant kalz aked,
Gwirioneou ar feiz,
Ha, dirak hon c'hentadou,
Souezet-bras meurbet,
E reas kalz burzudou
Keit ma voe war ar bed.*

*Sant Tual a Landreger,
Ken karet 'barz ar vro,
En devoe outan preder
Ha neuze, tro-war-dro,
Da brezeg d'ar Vretoned
E kasas prim hon zant.
Kalz en deus sklerijennet :
N'ouzon pet mil ha kant.*

Da veva da Lanvode.
E ya, skuiz gant an trouz ;
Met an dud en em vode
En dro d'e leheun blouz.
Ha neuze, d'eun enezig
Leun a aered, e tec'h ;
Eno al lônéd euzik
'N eus lac'het holl hep nec'h.

Roet 'n eus ive ar vuhe
Da vab eun otrou meur
'Oa lac'het, pebez true !
O c'hoari gant e-vreur.
War-lerc'h ar seurt burzadon
'Voe karet gant an holl
Ha brudet-bras, ma zudou,
Er vro-man ha dre-holl.

'N eur c'heo dindan an Douar
E varvas hon zant mat
A-barz mont d'al lec'h klouar,
Da varadoz hon Tad.
'Rôk mervel, pebez dudi !
'Savas eur chapel goant
Gant Botmael ha gant Tudi
A oa ive daou zant.

Enoret eo e Lennon
Sant Mode en Nac'h-Gwenn,
Eur chapel tost d'hon c'halon
'Lec'h 'ma ar Werc'hez wenn
O roi d'he farrezioniz
Skoazell ha « kelou mat ».
Dreizo Doue, Lennoniz,
Hon digemero mat.

KANTIK SANT NIKOLAS

DISKAN

Sant Nikolas, aman 'harz ho skeuden
A greiz kalon ni ginnig hor peden.
En hon ene lakit ho vertuzioù
Evit ma zimp oll eun deiz d'an envou.

Sant Nikolas, lakit ar yugale
Var an hent mad gant doujanz da vale,
Ous-tad ha mam grit ma vezin sentuz,
Mouez ar guerent o veza mouez Jesus.

Sant Nikolas, truez ous an c'hlanvour
En e derzien pa c'houlén ho sikour,
Torrit e boan, ma zeo mepnoz Doue
Evit e vad asten c'hoaz e vue.

Sant Nikolas, mirit ar yaouankiz
Glan a galon var hent an honestiz,
Beh an amzer grit ma vezin fidel
D'en em vaga gant an Hoshi zantel.

Sant Nikolas, hoc'h hano da viken
A vo meulet en hon tiez kristen,
Deiz ho pardon, d'oc'h eta mil bennoz
Var an douar evel er baradoz.

KANTIK ITRON VARIA GELOU MAD

DISKAN :

*Itron Varia Gelou-mad
Stouit varnomp ho taoulagad ;
Pedit bemdez ho Map Jesus
Da roi d'omp oll graçou nerzus.*

Hon tadou koz ken leun a feis
A zavas chapelioù eleis ;
Unan-o-deus savet ama
Guestlet d'an Itron-Varia.
Da heul ar peoc'h en hon touez
Dalc'hit ato guir garantez,
Ra vo ar famillioù renet
'Vel Famill-Zantel Nazareth.

Da Vari e karent diskouez
Ho fizianz hag ho c'harantez ;
Ha Mari, eus ar baradoz,
A skuille varnho mil bennoz.
Bremen e velomp an Iliz
Taguet, goalgasset e peb giz ;
Dre ho peden, Mam gallouduz
Harpit Ilis ho Map Jesus.

Guerc'hez, pe guir var hon
[tadou
O peus skuillet cals a c'hraçou,
Plijet ganoc'h, plijet ive
Roi ho pennoz d'ho pugale.
Pedit ive, Mam benniguet
Evit ar Franz muia karet,
Ra vo enbi freuzet a gren
An oll lezennou digristen.

Pa glasko an diaoul milliguet
Hor poulza varzu ar pec'hed,
Ep dale tam, deut d'horzikour,
Ma vezimp trec'h d'hon ene-
[bour.
Pa vo peurachu hon amzer,
Pa vimp galvet gant hor Bar-
[ner,
Goulennit deomp beza e stad
Da glevoud oll ar c'helou mad.

E kreis oll boanioù ar vuez,
Glac'har, anken, tristidigez,
Ni jomo d'oc'h fidel bepret,
O Mari, n'hon dilezit ket.
Pedit ma glevimp gant Jesus
Ar c'helou-man ken dudius :
Servicherien va Mam garet,
Ho plaç ea Env a zo merket.